

42

## Ar marc'hadour Rouan.

(f° 49)

Ar marc'hadour a lavare, pourmen var paveo Rouen  
 Me a meus choazet eur mestrezik hag a zo mistr a moan  
 En he dirvar en deus koular, he diou chod zo evel al roz  
 he c'horf a zo ken galand, mond a raffe em boz.

Deud tu ganen berjeren da choas eul lien moan.  
 — Salokras marc'hadour tano e zeo d'ar gouan  
 Salokras marc'hadour dar gouan e zeo tano  
 A me zo eur berjeren ne c'hon ket an ampezo.

Deud tu ganen berjeren da ober eur bale  
 Da Klask olin va lojeis, c'houi a voar an douare  
 Da lakat va marc'hadoures en eur plas assuret  
 E lec'h ma verzo tud honest a ne vesint ket laeret.

Salokras marc'hadour salokras nan din ket  
 An dud a zo ken habil ac'hanon ve koezet  
 met ahalen me o c'hencho da vonnet gant ar ru  
 en hostaliri a dorn deo c'houi a verzo lojet sur

Ar marc'hadour a c'houlenne tal dor an hostaliri  
 Neket aman an hostaliri e ve lojet tud eni  
 ho eo eme an hostiset diskenet a deud en ti  
 Me ia da lakat ho ronset ebar<sup>eur</sup> en merchossi.

Berza zo kig a bara a kambhou dereab  
 A balamour d'am c'hoar gaer c'houi a verzo lojet mad.  
 Var dro dek hag eunek eur, pa voa poent mont da kousket  
 Ar berjerenik iaouank er ger zo aruet.

(f° 50)

O grassou mad berjeren hag o trugarekad  
 Mar deo balamour dec'hu me a verzo lojet mad.  
 Aman e zeus eur goele zo varman tapisson quen  
 He gare evit kant skoet e vem enon o tisken.

Aman e zeus eur goële zo varman tapissou glas  
 Me a gare evit kant skoet e vijem om daou ebars.  
 — ho eleel marchadour, ne nem c'haketit ket  
 Na c'hui a ro din eun enor na ne meritan ket  
 Nag eben eiz dervez goude voan[te] o daou dimeet.  
 A ben eun ter siun pe eur mis e voa gret an euret.

Me a ia breman e mezan var ar mor eun neubet,  
 Da kerc'het va marc'hadoures a meus abandonnet.  
~~Salokras~~ <sup>en an Doue</sup> emezi var ar mor ney deot ket  
 An avel a zo gadel hag ar mor zo traitour

Mar c'harrife ken divad pe ar maro eb ken,  
 Me a zo digasset aman e lee'h na anavean den.  
 Me a zo digasset aman e gis deur vinores  
 A renk kemer ar sousi ken en ti vel er mes.

(f. 51)

En an Doue emean ma fried e nem gonsolet  
 Raq va c'halon dija a zo qasi ranet.  
 Me kasso dec'h ac'hane va doug evit present  
 Eun habid kaer a satin hag eun neubeud arc'hant.

Me zigasso dec'h eun habid deus a melankoni  
 Hag a zalc'ho va unan an hini a souci.  
 Me zigasso dec'h eun habid deus ar c'haera mezer  
 Hag a ben tri deves aman me a vo arvu er ger.

Na pa voa an intanvezik (1) en e goële kouset  
 Eun el quen var ar prenest tri tol en deus skoet  
 Savit tu intanvezik da rezo eur bresent  
 Dalit tu galon ho bried en eur c'hasset arc'hant.

Neb velfe an intanves o tisken deus e c'hamb  
 A rog dirzi eur c'habucin a daou belek iaouank  
 A rog-zi daou kabusin deus en digas dan ilis  
 An daelou he daoulagat e koueza evel glis..

An daelou eus he daoulagat e koued d'an douar  
 E dal begou he boutou evel pechou c'houec'h real.

(1). — La finale ik (de intanvezik) a été ajoutée après coup.

44

Gwel eo deur minor iaouank diweret a mam a tad  
 erid nam deo d'an intarvez diweret a pried mad  
 Raq eur minor iaouank a gavo eur gondition benag  
 E Lec'h kalon an intarves zo en tourment noz a de.

(f° 52)

}

Jannet Kerquiduff 23 X<sup>bre</sup> 1850.